

ALIOU MAD EUR BRETOUN

D'ANN

ELEKTOURIEN

DIVAR AR MEAZ

Araok mont da voti bep tro



BREST

IMPRIMERIE DE J. B. LEFOURNIER AINÉ

86, Grand'Rue, 86

1871

ALIOU MAD EUR BRETOUN

D'ANN ELEKTOURIEN

DIVAR AR MEAZ

Araok mont da voti bep tro



Tud divar ar meaz, eur pennad zo hoc'h euz
gullet ar Republikaned o trei ouz-hoc'h, Repu-
blikaned ar 4 a viz guengolo ; ar re-ze a rea
tud diskiant, tud diod ac'hanoc'h araok, a lavare
hag a skrife er c'hazetennou dre Vreiz ha Bro-
C'hall ne vije ket dleet d'ho seurt-c'houi voti,
dre ne voac'h ket, eme-z-ho, evel tud ar c'hea-
riou, mad da veza elektourien.

Ar Republikaned-ze, goude ho tispenn evel-se
koulskoude, a zo bet savet enn eunn taol eur
froudenn enn ho fenn ; troet ho deuz ho c'hom-
zou evel krampoez lardet, ha c'houi, tud diod



Église catholique
en Finistère

Document numérisé en 2025

a-raok, a zo deut neuze da veza ho mignoured, mar plij. Koulz ha me hoc'h euz lennet ar c'hoz tamm lizeriou ha kaosiou prevedet kouezet dre ho ridellou toull evit diskouez d'e-hoc'h-c'houi e voa brema boedenn dindan kroghenn ho penn, e voac'h *tud a vemor hag a skiant vad ive*, ha var guement-se e pedent ac'hanoc'h *da voti evit tud ar Republik*.

Klevit mad ! Mar kav d'ar Republikaned-ze ez euz deut skiant d'e-hoc'h a-nevez zo, goulennit perak neuze ho deus-hi digaset d'e-hoc'h ar Republik, pa n'ho poa tamm e-bed goulennet anezhi, na lavaret d'ezho mont d'he c'hask euz ho perz ? Goulennit out-ho ive perak e fell d'ezho kas brema kuit, er meaz eus ar Gampr, ann deputeed ho peus bet hanvet ann eiz a viz c'houevreur dremenet ?

Ma ne c'houzoc'h ket, va zud, perak e fell d'ezho kement-se, me a ia d'her lavaret d'e-hoc'h. Ann deputeed a zo bet hanvet gan-e-hoc'h neuze a zo tud onest, tud gwisiek ha tud a skiant, hag a gred ne bado birviken Republik e-bed enn hor bro. Dre'n abek-ze eo e klask brema ar Republikaned ober goab ac'hanoc'h, ha goab a raint mar kredit eur guer euz ho guenou. Evel koz keillen ne baouezont da nijal enn dro d'e-hoc'h, ne froumont evel-se enn

dro d'ho tiskouarn nemet evit ho poudinellat gant ho guevier, mar guellont.

Daoust ha n'eo ket evit dont a-benn da lakaat Bro-C'hall dindan ho c'hrabanou eo e lakeont ho holl galloud da zistrei ac'hanoc'h dioc'h voti mad ? Krial a reont a-bouez ho fenn e tigasoc'h evel-se ar brezell civil hag ar brezell a-ziaveaz bro, mar kemerit da zeputeed tud hag ho peuz fisianz enn-ho, dre ma hoc'h anavezit er-vad, dre ma c'houzoc'h piou int a-bell zo, dre ma'z int tud gwirion ha leal, douguet mad evid-hoc'h hag evit mad ho bro.

Klevit mad eta, tud divar ar meaz, me lavar tud euz ar vro : ar Republikaned a anavez hirio hoc'h euz *skiant ha memor vad ouspenn* ; ma n'eo ket gaou, e tleit kaout sonj n'eo bet abaoe pevar-uguent vloaz zo, Republik ar Republikaned nemet peb tro hag e pep amzer revolution hep paouez, deut euz a bennou tud ne falveze d'ezho nemet, pep-hini d'he dro, sevel er c'har-gou huella ha skrabat a zeou hag a gleiz da garga ho godellou.

N'hoc'h euz ket ankounac'heat euz bet stag atao oc'h lost kement Republik a zo bet e Bro-C'hall brezell civil, dismantr ha lazerez eleiz hag e deuz, diou weach var deir, digaset brezell a-ziaveaz bro, brezellou spountuz a zo bet eat

gant-ho goad ho iaquankiz, ann divreac'h a c'houneze bara hag ann arc'hant dastumet gant ar c'houezenn dioc'h ann tal.

Memor hoc'h euz ha n'hoc'h euz ket ankounac'heat eo Republik 1793 e deuz lakeat Bro-C'hall ha Breiz dindan treid ann Napoleon kenta. Hen-nez eo en deuz lakeat hon tadou er mareze da ouela d'heul beteg ar goad, en deuz digaset d'he heul diavezidi da flastra hor bro dindan ho seuliou.

Memor hoc'h euz ha n'hoc'h euz ket ankounac'heat c'hoaz Republik 1848 e deuz digaset d'e-omp eul loufrez, ar fallakra den zo brema beo, ann Napoleon III, ar milliguet-se en deuz distaolet war-n-omp ar Brussianed ha var ho lerc'h tud Republik ar 4 a viz gwengolo 1870. Pe Impalaer, pe tud ar Republik, pere, lavarit, tieien, pa hoc'h euz skiant ha memor, pere anezho eo ar re vella evid-hoc'h hag evit ar vro, pa'z eo red hirio, her gulet re vad a rit, siouaz d'e-hoc'h ha d'e-omp holl! pa'z eo red klask a bep tu peadra da zressa ann dismantra zo bet great gant-ho pep eil; peadra, me lavar arc'hant gounezet enn amzer Napoleon, da baea brema d'ar Pruss ar pemp milliard a dleomp; da gas arc'hant d'ann tenzor bet goullonderet gant pao hen-nez hag he dud, ha war ho lerc'h gant krabanou

ar Republikaned? Bezit goude a-du gant ar rema; roit skouarn d'ezho hag o pezo muioc'h a vemor c'hoaz divezatoc'h, rak mar tont da veza treac'h, e vlot sunet gant-ho bete mel hoc'h eskern.

Enn amzer ar Roueed koz, ne glevet gant ar Republikaned nemet glevier diwar ho fenn, ann taillou a iea da dregont lur dre benn pep bloaz; hirio ne baer ket nebeutoc'h evit dek lur ha triuguent. Republikaned, diskouezit e lavaromp gaou, ha c'houi, tud divar ar meaz, savit gant ar babbred vreo-ze, votit evit-ho hag evit ho zud hag e lavarint ho pezo skiant. Skiant prenet re zivezad e ve neuze ar skiant-se, diouallit-mad!

Enn amzer Roueed koz Bro-C'hall e velat ho baniel guenn o sevel huel er bed; dira-z-han e stoue ar boblou holl hag hor bro, ar guenta euz ann holl vroioù, ne devoa ezomm e-bed da ober brezell evit dere-hel ar renk huella bet gounezet gant ar Roueed-ze. Hirio dindan ar Pruss, diskaret gant-han ha flastret kouls lavaret, emamp er c'houeac'hved renk: var-lerc'h ar Russi, var-lerc'h ann Allemagn, var-lerc'h Bro-Zaoz, var-lerc'h ann Autrich hag ann Itali zo-ken.

Kement gaou a vezo chaaket ha lavaret d'e-

hoc'h, kement komz-treuz a c'hellfe diskolpa tud Napoleon ha tud Republik ar 4 a viz gwengolo evit lakaat ac'hanoc'h da skei divar ann hent eeun, hent pep lealded, ar c'haosiou-ze, peguer brao-bennag e c'hellfent beza dizachet a-zira-z-hoc'h, ne lakaint birviken ar virionez da veza gaou, na ne c'holoint ken-nebeud all ann dismantr a zo bet great gant ann daou c'houarnamant-ze, ker fall ann eil hag eguile.

Ann impalaer en deuz tromplet ac'hanoc'h gant he blebiscit, oc'h ho lakaat da gredi ez ea, goude naontek vloaz, da rei d'e-hoc'h kement liberte ho poa guir da gaout, ha gant *la* lavaret gan-e-hoc'h d'he c'houarnamant, enn aoun rak ar revolution, Napoleon evit kuzet he droiou fall ha louz a ia var he benn da ober brezell d'ar Pruss, eur brezell spountuz, hep beza e doare tamm da deurka ar Brussianed, na zo-ken da herzel out-ho. E peleac'h edo he dud hag he arc'hant? Ann arc'hant a ioa bet pell a ioa lipet gant-han, ha gant tud milliguet evel-d-han. Hen-nez koulskoude, mar d-eo eunn den oa, hen-nez a rea ar pezh a gare gant holl arc'hant ar vro... Petra int deut da veza ha da beleac'h eo eat kemend all a vadou ho peuz-c'hui roet d'ezhan? E peleac'h ema enor ha goad tud Bro-C'hall, goad ar vugale-ze a zo bet maguet ha

savet gan-e-hoc'h, goad skuillet e pep korn euz ar bed er brezellou diskiant-ze? Ann diveza brezell anezho en deuz tumpet he-ma divar he dron; kouezet eo e Sedan euz a lost he gar er vouillen, evel he eontr e Waterloo.

Brema, lavarit, petra ho peuz gounezet gant ar Republik, abaoe ar 4 a viz gwengolo? Brezell, brezell hep distag, brezell atao, dalc'het digor gant Republikaned a gave eaz kas ar re all a-raok ha tec'het kuit ho-unan evel guedoun dirak chas. Ma ve dastumet ar goad skuillet epad ar brezell-ze e ve great eul lenn doun ha ledan, mad da veuzi ar Republikaned, a denne ar Brussianed e-kreiz hor bro da vuntra, da zevi, da zismantra pemp departamant war-n-uguent.

Goude-ze, kredit mar ho peuz skiant, n'eo ket gant ar Republik, na gant he zud eo ez oc'h bet tromplet, rak ma vije bet galvet ar vro, d'ar bevare a viz gwengolo, da henvel he deputeed, ar Gampr nevez-ze a vije bet selaouet he mouez enn Europ gant ar boblou-all ho divije neuze lakeat ar Pruss da rei d'e-omp ar peoc'h, hep goulenn pemp milliard euz hor godellou hag hep diframma diouz-omp diou vro euz ar re vella. Ar Republik eo eta, kaer a vezo glabousat da glask he meuli, ar Republik eo e deuz kaset

ac'hanomp war hor penn, e deuz diskouezet d'ar bed-holl spourounet, da zoudarded ar roue Pruss varzu pebez mez ha dizenor e tenn diroll tud hep feiz na lezenn, *tud ar Gommun* bet epad pevar miz ar vistri er gueur guenta euz ar bed. Kanit goude meuleudi ar Republik, evel killeien divar ho c'hlud !

Kaer ho deuz ar Republikaned, kaer ho devezo kana ha diskana var pep seurt ton, ho c'han hag ho diskan a lavar e c'houzont er-vad ema malheuriou ar vro oc'h ho barn ; sevel a reont hag a raint e pep leac'h hag e pep kaloun leal enn ho enep ; kaer ho deuz klask trei ha distrei ho c'homzou, skiant ar bobl, ho skiant-c'houi dreist-holl, ho memor ive, tud divar ar meaz euz a Vreiz, a c'hoar er-vad ez eo guevier a zislonk dre ho gouzoug hag ho guenou. Kaer ho deuz flipata gant ho zouchen, endra c'hellont, a-enep ann deputed onest ho peuz hanvet ann eiz a viz c'houevreur, a-enep ar Roueed koz, a enep ar feiz, ar religion, a-enep kement tra a zo guirion, leal ha mad ; ho flipajou, ho c'homzou, ho guevier a ielo gant ann avel, mar d-oc'h tud evel ho tadou, mar prennit ho tiskouarn, mar talc'hit d'ar virionez, ha mar fell d'e-hoc'h beza euruz.

Sellit hag evesait piz piou eo ar re-ze, ar Re-

publikaned-ze, guelit piou int, petra eo ho buez, ha dioc'h ma vevont barnit ho c'homzou hag ho skridou. Mar lennit ar c'hazetennou, darn ac'hanoc'h, e c'hellit guelet er-vad, tud divar ar meaz, ne vez great goap ac'hanoc'h, euz ho feiz kristen, euz ho relijion, euz ho peleien, nemet e kazetennou ar Republikaned vrao-ze a veloc'h o trei ouz-hoc'h ker koantik ha tra, pa ho devezo ezomm euz ho mouesiou ; neuze evit lakaat ac'hanoc'h da denna kistin d'ezho euz ann tan, e vezo flour ho dourn var ho kein, neuze kuzet ho ivin dindan ho biz maneg e raint ormidou, e klevoc'h anezho o lavaret ho deuz kement ha c'houi a feiz, a relijion, ho deuz doujans Doue, respet evid-hoc'h, hag e fell d'ezho e vec'h libr da ober ho teveriou kristen. Evit lavaret berr, neuze ho peleien ho defe beac'h o prezeg koulz hag ar Republikaned-ze a vezo, var ho meno, ho mignoured beteg ann deiz ma vo red voti evit ho, na petra-ta ! Goude a-vad e viot panezennou, ha tud kleuk evel araok. Ar Republikaned a zo tud vad, — ia evit-ho, — respet ho deuz evid-hoc'h, gant-ho e vezoc'h libr, nemet e fell d'ezho, mar kasit ho pugale d'ar skol, — hag ho c'has a reoc'h ha pa n'ho pefe ket a c'hoant, — ne ve eno hano ebed euz a Zoue nag euz a ziaoul. Daoust da betra sko-

liou kristen d'ar vugale enn amzer-ma? Ma ve c'hoaz deski d'ezho a rafet ober drouk, tui, efa guin, ha kalz a draou all falloc'h, ne zeskont nemet re vuhan etre-z-ho; ann traou-ze, ne lavarann ket, a ve kavet mad gant ar Republikaned deski d'ho pugale. Kredit pe na gredit ket, tud vad eo ar Republikaned, tud, klevit mad, hag a drouc'h ho c'hountel kel lemm hag aoten-nou dioc'h ann daou du. Mar ho c'hlevfac'h hirio o tamall, o teurel mein lemm oc'h guenou tud ar *Gommun* euz a Bariz, dre ma'z int tre-c'het, paket ha barnet re c'houstad brema, ne gredfac'h birviken eo ar re-ze a falveze d'ezho forsi ann deputeed da bardouni dioc'h-tu d'ar gomunisted-ze, a-greiz ma'z edont guasa o laerez, o laza, o tevi hag o klask diskar pep tra vad hag ar c'houarnamand zo-ken, a-greiz ma'z edont o stourm a enep hor soudarded ho deuz, dre nerz ha kaloun, gallet dont a-benn anezho.

Mar d-eo ar Republikaned tud vad hag eeun pep neudenn gant-ho, ez int ouspenn tud guesiek, tud desket mad, pa garont, dreist-holl, ha pa fell d'ezho enn ho c'hazeten-nou, enn ho skridou ne ve kavet enn tu-all d'ezho da veza kinklet brao, moullet e doare, ma na ve ket a boan o tifuilla enn-ho al lost dioc'h ar penn, ha ma na zislavarfent ket nao pe zek gueach ar pezh a leve-

ront pemp pe c'houeac'h gueach-all. Er c'hoz tam-mouigou skridou-ze n'ho deuz mez ebed oc'h en em ziskouez e c'heller lenn istor hor bro, istor ar Roued koz evel biskoaz n'eo bet skrifet, na c'hoar-vezet nebeutoc'h c'hoaz. — Ann istoriou-ze, klevit, tud divar ar meaz, a zo bet great hag evel terket evid-hoc'h-c'houi hep-ken. D'e-hoc'h-c'houi e c'heller diskolpa guevier anat; ann dra-ze a c'hoar paotred vrao ar Republik ha nemet e c'hellint lakaat achanoc'h a-du gant-ho, ne reont forz ebed petra vezo lavaret divar ho fenn. Tud evel-d-ho ne garont ket ho bro, pa glaskont diskar anezhi ken izel ha ma'z int kouezet ho-unan. Karit tud evel ar re-ze goude; fisit enn-ho hag a-benn eur pennad ama c'houi, lakeat evel pennou chat-gant-ho, a vezo berr ar peuri d'ho kenou. Nann! nann! ar Republikaned ne zellont oc'h netra nemet out-ho ho-unan, kaout arc'hant ha pa ve a guil-dourn; beza euruz ha dibreder gant boed ha friko da lakaat kof teo enn ho braguezenn, setu ne c'houlenn ken paotred ar Republik. Petra ra d'ezho gloar Bro-C'hall, ar c'hloar, ann enor ze deut, a-raok ar revolution guenta, a berz ar Roueed koz? Gant ar Roueed-ma hep-ken eo deut Bro-C'hall ar gaera, ar c'halloudusa, ar binvidika bro euz ar bed. Petra bennag ho deuz bet great holl, pep-hini hag ann eil goude

eguite anezho, ar Republikaned, tud vad, tud leal, tud guisiek, a zo ive tud re zidamall ho buez evid choum hep kaout abek e buez darn Roueed a zo bet e Bro-C'hall. Koulskoude, beteghen n'hor beuz ket guelec'h c'hoaz e ve bet ken-nebeud kaset da zant hini ebed euz a baotred ar Republik. N'euz ket bet a dro d'ann draze c'hoaz ; pa vezo, e c'hell Sant Per digueri a vole - vann ann nor-dal vraz euz ar baradoz d'ezhan, hag he gas krog enn he zourn dirak meur a zant a zo eno, bet Roueed e Bro-C'hall. Ouspenn zo, hag e ve bet eur roue fall bennag, ha red eo lavaret ez int bet fall holl ? Ha red eo tamall ar feiz, ar relijion, ann holl veleien, o veza ma'z euz eur beleg-bennag hag a ve eat divar ann arouden ? Ha mad e ve lavaret n'euz barn, na barner leal ebed, o veza ma'z euz bet kavet abek e nebeud barnerien zo ? Var ar gont-ze neuze, tieien, e vezoc'h lakeat holl kourerien ha labourerien fall evit eunn tamm douar-bennag a vezo bet choumet hep beza labourer mad gant unan pe unan ac'hanoc'h ?

Evel-se koulskoude a ra darn paotred ar Republik, darn skrifanerien zo enn ho zouez a ve eunn tamm brao kalz guelloc'h d'ezho mont da denna al louzou eus a greiz ho farkeier

panez, mad d'ho boeta hi hag ho chatal, eguet mont da glask abek e buez eur Roue-bennag euz ar gaera gouenn Roueed a zo bet biskoaz dindan ann heol benniguet. Kaer ho devezo lavaret, eur ouenn eo hon-nez hag e deuz great euz a Vro-C'hall ar gaera rouantelez, goude rouantelez ar Baradoz.

Hoguen, ha pa ve bet eur Roue-bennag da dammall, daoust hag e presidanted ar Republik, ma ve sellet piz oud ho buez, ne ve kavet netra e-bed da lavaret ? Ann aotrou Robespierre, ann dibenner tud, hag he genseurted, kanfarted 1793, eo ar baotred-ze, marteze ne deuz abek ebed enn-ho dirak ar Republikaned, nag ive enn hon amzer-ni enn Aotrou Gambetta, respet d'ehoc'h ! Epad pemp miz eo bet he-ma mestr ha maill braz enn hor bro ; maill, ia, rak skoet ha lakeat darc'hai var-n-omp enn deuz bet great, ar pounnera taoliou en deuz bet gallet ; evel var anneou houarn e lope a - drojou tro-var-dro, nemet du-ze, dioc'h kostez ar c'hus-heol, he vro Evel ho mestr hag ho fatrom braz, tud ar vro-ze a chaoke, da betra ken e vent-hi mad ? Hag a harze evel koz chas-gaol oc'h ar bleiz, a-ziabella ma c'hellent, rak evit mont da dostaat out-han da fistoulat ho lost ha nebeutoc'h c'hoaz, da ziskrouigna ho dent, ne voant he traou ken

diskiant - ze, oh netra ! Ouspenn zo penaoz ho divije kavet amzer da ober netra all ebéd, gant ar brezell civil a reant ann eil d'eguille enn ho c'hear. Dre - ze eo e kase ann Aotrou Gambetta, mar plij gan - e - hoc'h, armou d'ezho da c'hoari, armou lamet euz a zäouarn ann dud kalounek a iea euz hor bro hag euz ar broiou all da herzel oud ar Brussianed, hep aoun da vervel. Enn doare-ze eo e c'hellit kredi eo bet kresket bern braz ar c'horfou maro, laset kalz anezho a-raok gant Napoleon, ar milliguet, er C'hrimee, enn Itali, er Mexik hag e Bro-C'hall, enn he daou-benn hag enn he c'hreiz.

Eur virionez eo : ar Republik a zo eunn truez zo-mui-ken klevet hano anezhi, hag evit he lakaat da zont da veza mad, e ve red kaout d'he ren tud hag ho defe pe a c'hellfe kaout skiant ha penn. Siouaz ! ker rouez int ar re-ma var he zro, ne ve ket kavet marteze daou vad zo-mui-ken e Bro-C'hall, e-touez kemend-all a strouez Republikaned. Nemet danvez gouzer n'euz bet savet biskoaz abaoe pevar-uguent vloaz zo, ha ne zavo biken, evit doare, enn dro da goz vezenn avalou pud ar Republik.

Klaskit goude-ze, tud divar ar meaz, klaskit ar Republik ! klaskit gant-hi beza e peot'h, beza euruz, beza libr ha vag, mar guellit, enn

ho pro ; ha mar d-eo mad ho taoulagad da velet a-bell, sellit ha guelit pe seurt stad a rear ac'hanomp hag euz hor bro, e-mesk ar boblou all, abaoe revolution 1793, abaoe revolution 1848, ha dreist holl enn amzer a zo brema.

Mouez *Iann Gaboch* a zao dre greiz ar Republikaned da ziskouez : guella a -zo er Republik eo dre ma c'heller sench mestr ar c'houarnamant, ken aliez ha ma vez c'hoant ar-bobl, hag hervez ma tro enn he benn.

Piou neuze, mar plij gan-e-hoc'h, a vezo lakeat da varn etre froudenn ha stultenn ar bobl ha penn pe mestr ar c'houarnamant ? Hag ar Gampr eo a vezo ? Ann tu anezhi a vezo ar c'hreva hirio, var-c'hoaz e devezo lamm, a vezo ann distera hag ann nebeuta tud o sevel gant-han, rak guelet a reomp bemdez ar skiant loc'h-di-loc'h, brema a-zeou, bremaik a-gleiz. Piou etouez ann dud, etouez kalz a dud zo-ken, a c'hell lavaret ha toui ne sko morse e-biou d'ar virionez ?

Ma ve ha ma chomfe ar c'houarnamant evel ma karfe *Iann Gaboch*, e c'hallfet tremen ann amzer, pep eiz dervez pe nebeutoc'h, da ober ha da zizober Presidant ar Republik, pep gweach m'en defe c'hoant unan pe unan da vont enn he leac'h. Ann dra-man a ve neuze, evel enn hor

bro Breiz-ni, eur c'hoari a zo etouez ar vugale vihan, hag a rear anezhi : *C'hoari kas ar fall er meaz.*

Evel-se ne c'hoarvez ket gant ar Roueed. Ne deuont nemet goude mervel, ann eil var lerc'h eguile. Gant gouarnamant eur Roue ne deuz nec'h ebed da gaout divar-benn ann dra-ze, rak Kambr deuteed ar bobl a zo eno evit digas da vad kement e deuz c'hoant a deufe, kement a gred a zo red a ve great; bez' ema evit gullet petra a ra ar Vinistred hag ar re a zo er c'hargou huel, evit mad ann holl ha mad pep hini, hep mont da zellet hueloc'h oc'h ar Roue, da loc'h na da ziloc'h anezhan. N'eo ket ann dra-ma diveza eo karg ann deuteed er Gampr.

Eunn dra a zo ha ne baouezimp da lavaret evit, mar guellomp, lakaat ann daoulagad da velet hag ar spered da zigueri; hag ann dra-ze omp souezet e ve tud ken dall ha ken diskiant ne anavesfent ha ne anzaivent ket eur virionez a zo ker sklear hag ann heol enn envou. Epad eiz kant vloaz euz bet Roueed e Bro-C'hall ha gant-ho ha dre-z-ho, petra-bennag eo bet ho buez a hent-all, ar vro-ze a zo deut da veza ar vro guenta euz ar bed. Abaoue a-vad ma'z eo bet diskaret ar Roueed, Bro-C'hall n'eo bet a vloaz-da-vloaz paouezet da goueza izeloc'h-izela,

evel ma'z eo anat ha sklear brema da guement den a skiant a zo.

Ann Aotrou Doue n'eo ket diskennet euz ann env da lavaret da dud Bro-C'hall : Kemerit d'ho kouarn ann hen-man-hen euz ar ouenn-ma-ouenn, nann da! N'eo ket ann Aotrou Doue en deuz lavaret ann dra-ze, skiant ar bobl a rumm da rumm eo, hag ar skiant-ze, epad eiz kant vloaz, en deuz anavezet er-vad eo gouarnamant ar Roueed, a deu goude mervel ann eil var-lerc'h eguile, eo a zo gant-han pep urz vad, peb eurusded evit ann holl, koulz evit ar re vihan hag evit ar re vraz, evit ar paour hag ar pinvidik. Dre skiant ar bobl, enn amzeriou-ze, dre vadelez ha furnez ar Roueed, rouantelez Bro-C'hall, pobl ha Roueed, a zo bet benniguet gant ann Aotrou Doue, ha bennoz Doue, klevit Republicaned, a zo ar wella tra da zerc'hel den ha pobl euz hag ar bed enn he zav.

Kement gaou a lavar ar Republikaned divar-benn ar Roueed a ziskouez sklear eo gant eur Roue eo e ve eurus tud Bro-C'hall hag e ve lakeat ar vro he-unan da zont da veza evel m'eo bet guechall : braz he galloud, braz he enor, braz he douar, peguement-bennag me deuz ranket ober brezell ha ma zeuz bet kouezet reusiu hag enkresiu e-leiz war-n-ezhi.

Eunn darn dud a en em glev da lakaat ho arc'hant etre daouarn eunn den a gomers evit prena, guerza ha gounid. Neuze, mar c'hoarvez ne laka ket ann den-ze ann arc'hant zo etre he zaouarn da dalvout aoualc'h, e vezo lakeat eunn all enn he leac'h, hag ar zosiete a bado atao evel-kent. Ne d-eo ket evel-se eo buez eur bobla bad nousped kant vloaz a rumm-da-rumm, dre ar vugale oc'h herita d'ho zadou.

Dre guement-se eo eaz guele, da biou-ben-nag en deuz skiant, ne c'hell ket padout eur c'houarnamant a zo sench-dizench bemdez; bre-ma o kemeret he-ma da vestr, bremaik o kas hen-nez kuit. Ar vro zo gouarnet evel-se a ia euz ann eil revolusion d'eben, a gouez e pep dizurz ha da ziveza, difframmet ha dismantret a bep-tu gant Per ha Paol a fell da bep hini anezho sacha gant-han he grogad pe he c'hodellad, ne zale ket da vont var he fenn da goll.

Ann Napoleon diveza, daoust ha n'eo ket bet hanvet gant daouzek milion vouez hag ann daouzek milion-ze ne anavezent ket ho den, a zo en em faziet, pa'z eo guir ar milliguet-ze en deuz koulz lavaret kollet Bro-C'hall ha lakeat anezhi er stad truezuz ma velomp.

Perak kement-se ? O veza ma'z eo bet hen-nez pignet dre laer var ann tron, o veza m'en

deuz kroguet dre starn ann daol e siblenn karr ar C'houarnamant, kouezet eno ken izel gant ar Republik ; rak klevit mad, Republikaned, guelloc'h eo bet gant ar vro beza dindan eunn den, euz ar re falla a zo bet biskoaz, evit beza e-kreiz diroll ar Republik, ken diboeil atao n'euz bet biskoaz gallet anaout d'ezhi na penn na lost.

Bro-C'hall e deuz bet eunn eil impalaer hag hen-nez kouezet, evel eil Republik 1848, a ziskouez sklear ne fell d'ar vro nemet gouarnamant eur Roue, hag ar pezh a ra o kaskuit anezho pep eil, a zo evel ma lavarfe : « Ann Impalaer a zo eul loufrez-kiger, ar Republik a zo eur freuz-ober, ha ne fell d'in hini ebet anezho ho daou, ne fell d'in nemet eur Roue, ha pa varvo, eur Roue-all gant eur Gampr a zalc'ho da bep urz vad, a zalc'ho d'ar Roue, o lezel ar bobl libr da voti hervez he volonteiz. »

Ar Republikaned gant ho alvokad *Ian Gaboch* a lavar e vez digoret brezell gant ar Roueed etre-z-ho, divar-benn traou ne zellont tamm e bed oc'h mad ar vro. Ma ve gnr a lavar ann dud gaouiad-ze, penaoz neuze Bro-C'hall, dindan gouarnamant he Roueed, e deufe gounezet, hini hag hini, kement all a vroioù ? Hag o koll he Roueed, e deufe kollet ive, ouspenn beza bet flastret diou veach dindan treid ann divroidi,

ann diou vro gaera e devoa bet digant eur Roue.

Nann! nann! Ar Roueed e Bro-C'hall n'ho deuz ket great brezell evit-ho ho-unan nag evit ho mad hep-ken; great ho deuz brezell evit mad ho bro, ar pezh n'ho deuz great biskoaz abaoe pevar-uguent vloaz zo nag ar Republikaned, na gouarnamant-all e-bed digaset dre ho dourn, pe deut gant aoun ra-z-ho.

Iann Gaboch hag he vignouned a lavar c'hoaz e koust re guer ar Roueed d'ar bobl, o veza ma rank paea d'ezho meur ar vilion pep bloaz. Ann arc'hant-ze a zo bet lakeat etre daouarn ar Roueed, a zo bet great vad gant-ho, lakeat da rei labour d'al labourerien, da rei aluzen d'ar re baour, hep n'eo bet evit kement-se biskoaz kresket ann taillou var ar bobl. Ouspenn c'hoaz a c'hellfet lavaret ama, rak ma veze paet ann arc'hant-ze gant Bro-C'hall d'he Roueed, petra oant hi, lavarit Republikaned, e skoaz ar madou braz ho devoa digaset, o staga oud hor bro broiou kaer ha pinvidik hag, e-touez ar broiou-ze, ann *Alsas hag al Lorrain* emaomp o paouez koll?

Evit beza guirion ha leal atao eo red eta barn hor Roueed koz dioc'h ar mad ho deuz great da Vro-C'hall ha diskouez ar pezh ma'z omp bet guech-

all, e kever ar pezh ma'z omp hirio, evit ma c'houezoc'h mad, tud Breiz, peguement a c'hevier a vez diskolpet d'e-hoc'h gant teodou fall ar Republikaned.

Ar re-ma, ne baouezont da irienna d'e-hoc'h, gant ho fallagriez, guiadennoù guezier divar-benn ar Roueed ha kement tra vad all a zo. C'houi hoc'h-unan a zo ken dispennet gant-ho, ma'z eo red d'e-omp, evit rei skoaz d'e-hoc'h da zifuiella ar virionez, displega kement a lavaront zo-ken divar ho penn. Tud divar ar meaz, selaouit eta ha taolit evez oc'h ann dud, a-raok kredi anezho. Ne deuz nemet eur miz-bennag c'hoaz ma lavarent ha ma skrifent *ne voac'h nemet tud gouez, sperejou forc'hek ha berr, kourerien gleuk, ezen gornek*, hag evit diskouez ne lavarent ket gaou divar ho penn, e kredent komz d'e-hoc'h e vije, evel guechall, digaset a-nevez *deogou ar veleien, labourou aner ar vistri hag holl guirioù ann noblantz*; deogou, aner, ha guirioù a zo bet torret nebeud-a-nebeud ha da ziveza kaset da netra gant ar Roueed. Koulz koude ar guirioù-ze, ma ve lavaret ar virionez, ne d-oant netra neuze e-skoaz ann taillou braz a baeit brema ne c'hoar den nemed-hoc'h e peb guiz. Enn amzer-ze, ho tud koz ne veze goulennet digant-ho nemet ann dregontved euz ho eost, e-leac'h ma rankit-hu

brema paea da nebeuta ann dregontved euz a guement tra hoc'h euz, eost hag all.

Na gredit birviken eta e c'hallfe ar guiriu-ze distrei a-nevez gant ar Roueed, pa n'int ket bet distroet gant ar Vourbonned enn daou vloaz 1814 ha 1815, goude ma voa bet diskaret ann Napoleon kenta, rak biskoaz guelloc'h apoue n'ho devoe ar Roueed hag ann noblanz da lakaat ar guiriu-ze a-nevez, mar ho divije bet c'hoant enn amzer-ze.

Penaoz distrei evel se var ho c'hiz da nevezi guiriu ho devoa ann noblanz renonset d'ezho holl a-grenn, araok ar bloaz 1789 ?

Red eo anaout eta, tieien, tud divar ar meaz, ne glask ar Republikaned nemet trompla ac'hanoc'h gant ho gevier ; gouzout er-vad a reont, e prezegont a-enep pep guirionez hag, o tenna komzou born euz ho c'hoz kelorniu, n'ho deuz ken fisianz nemet e kredoc'h kement gaou a zispleguint d'e-hoc'h evit ho tistrei, mar guellont, da rei ho mouesiou d'ann dud a anavezit a-bell zo evit tud vad, tud a feiz, tud ho peuz fisianz enn-ho, d'ann dud-ze n'ho deuz biskoaz tromplet na c'houi, na den all e-bed.

Evit petra e teufent da drompla ac'hanoc'h-c'houi, ann dud-ze ne glever nemet *Iann Gaboch* hag he seurt o lavaret drouk divar ho

fenn ? Pe seurtvad, lavarit, a deufe d'ann dud-ze evit guisiou a zo eat re bell a zo enn dro, evit birviken beza nevezet ?

Daoust hag ann dud vad-ze a gomzomp anezho, hag a zo guelloc'h gant-ho beza a-zindan eur Roue ha goude he-ma dindan eunn all evit dindan eur Republik, a zo kant ha kant den pennfoll o lammet out-hi da skrabat pep-hini d'he vek, daoust hag ann dud-ze n'ema ket ho mad, evel hoc'h hini-c'houi, tud divar ar meaz, oc'h heuilla mad ann holl ha mad ar vro ?

Evel a c'hoar ann holl, evel a c'houzoc'h hoc'h-unan, tud Breiz, ann noblanz a zo a bell zo enn ho touez, e-touez ar bobl oc'h ober vad endra c'hellont hag atao er penn kenta pa vez red difenn ar vro ha pellaat he enebourien. Gant ann noblanz eo emaoc'h bemdez o veva, ho bugale hag ho re c'houi, tud divar ar meaz, ho deuz stourmet harp-oc'h-harp a enep ar Brussianed, ha marteze a zo kouezet ha marvet oc'h en em vriataat evel breudeur, poulladet ho goad mesk-e-mesk dindan-ho.

Brema, petra lavarit c'hoaz, Republikaned ? Eo revolution 1789 e deuz, eme c'houi, anavezet guiriu ha liberte tud Bro-C'hall ? Eur gaou muic'h pe nebeutoc'h ne d-eo ket kalz a dra d'ho kenou ; evelato, pa c'houzoc'h lenn, e tle-

fac'h gouzout ne gomz ket ann istor evel-d-hoc'h; ann istor a ziskouez kement tra a zo bet great gant pep Roue a oad-da-oad evit lakaat euruz pobl Bro-C'hall; hag eurusoc'h e guirionez e voa Bro-C'hall d'ar poent-ze gant-ho, evit na d-eo bet abaoe ha na vezo birviken gant guirion ha liberte ar republik ne d-int nemet daou c'her goullo hag ouspenn daou c'her gaou, abaoe ma'z int ganet gant ho mamm.

Anez ar revolusion e deuz diskaret pep mad, anez ar Republik e deuz lazet tud ha disman-tret kerion, Bro-C'hall, dindan he Roueed, a vije bet brema eurus a bro a vije er bed.

Ar revolusionou, ann tri goz-tamm Republik hag ann daou Napoleon eo e guirionez ho deuz lakeat da goueza var hon diskoaz ar beac'h pounner a bleg brema hor penn beteg ann douar.

Tud divar ar meaz, eur guer-bennag c'hoaz a zo da lavaret d'e-hoc'h. Selaouit 'ta ar virionez ! Lennet hoc'h euz, e meur a skrid great gant ar Republikaned, eo ar Republik e deuz trec'het *ar Gommun* e Pariz. Ma na vije bet eno nemet Republik ar Republikaned o c'hoari oud ar bennfollez-ze, hi eo a vije bet treac'h brema. Tud all, a drugare Doue, a voa eno; tud a skiant ha tud a galoun; tud a skiant ar Gampr a

gasaz da drec'hi ha da ziskar *ar Gommun* tud a galoun ann arme. Ne deuz nemet goulenn out-ho holl petra dalv ar Republik, petra e deuz great e Paris hag el leac'h all enn hon amzer. Petra e deuz great ha petra a c'hell da ober, nemet revolusion ha netra ken, evel abaoe pevar-uguent vloaz zo, abaoe m'he deuz kaset kuit ar Roueed koz ? Ar re-man, mar d-int kouezet, a zo kouezet gant enor; ha pep Republik a zo bet e Bro-C'hall a zo maro, koulz lavaret pep tro, e-kreiz ar goad hag ann dizenor, o leuskeul kaon ha dismantr e pep leac'h var he lerc'h.

Tud Breiz, setu eno ar Republik, ar c'houar-namant-ze a laka, eme darn zo, ann nebeuta dis-parti etre-z-omp. Ar re ho devz komzet evel-se ho deuz lavaret ar virionez hep gouzout d'ezho, rak goude ma vez bet ar Republik eur pennad enn hon touez, e vezomp holl ker skuiz-maro gant-hi, o velet ne deu d'he heul nemet kement tra fall a zo : brezellou, klenvejou ha naoune-guez, ma karfemp neuze ne ve bet anezhi biskoaz.

Ar Republik a zo gouarnamant ann holl, ha lezel dor zigor a ra da guement c'hoan-teguez fall a zao da bennou tud dis-kiant hag avelek ne fell d'ezho netra ken, nemet sevel dreist ann dud vad hag onest ha

dont da c'houarn ar vro, evit karga ho ialc'h hag ober ho zamm. Ar re-man hag ar re a laz hag a zef evit laerez ha destum, hep torr-korf, ar pezn'eo ket bet gounezet gant-ho, a zo daou rumm dud hag en em glev brao peur-vuia enn amzer ar Republik; ho guelec'h a rear atao neuze ann eil var-lerc'h eguile, unan gant kef ha kleze, ann eil gant sac'h ha kordenn, o vont dre ar vro da skigna ar spount hag ann enkreiz e tiez ann dud vad var ar meaz hag er c'heariou. — Enn amzer hirio hag enn amzer guechall e c'heller klevet ha gwelet ha gaou a lavarar ama. Penaoz goude, tud Breiz, lavarit e guirionez, e ve karet ar Republik a zigas var ar vro eur reverzi ken diroll? Penaoz e c'hellfe, enn doare-ze, padout pell eur c'houarnamant evel hon-nez e Bro-C'hall, bet euruz hed ar veach dindan gouarnamant he roueed? Tud Bro-C'hall evel-d-hoc'h-c'houi, tud Breiz, ho deuz skiant ha memor ive ann darn vella anezho; kredi ha lavaret a reont e rank eur vro hag eur bobl a gar ar roueed kaout eur c'houarnamant ne c'hellfe d'en, pe-guement-bennag e ve he c'hoant hag he fallagriez, tizout da baka ken huel hag ar roue.

Republikaned ar bevare a viz guengolo a lavar, evid ober aoun d'ann dud brema, mar teufe a-nevez var ann tron roueed ar ouenn goz

e tigorfe brezell adarre a-enep ann Itali, a-enep ar Pruss, hag hi o c'houzout er-vad koulskoude eo gaou ann dra-ze a lavaront, rak gant gouarnamant Herri pemp, o tont da roue, Bro-C'hall a gavfe neuze dioc'h-tu harp ha kred, evel guechall, e-touez ann darn-vuia euz a boblou ann Europ hag ar bed holl; harp ha kred ne gavo birviken gant gouarnamant ar Republik.

Daoust ha ne d-eo ked ar Republik hag ar Republikaned muioc'h c'hoaz eo ho deuz savet enn dro d'hor bro, hueloc'h eguet ar menesiou huela da goueza var hor penn, galloud ann Itali, rannet a-raok e pemp pe c'houeac'h gouarnamant vihan n'ho divije birviken gallet ober gaou e-bed ouz-omp? Daoust ha ne d-eo ket d'ar Republikaned eo e tleomp tamall, goude ann Napoleon milliguet, ar brezell spountuz a zo bet digoret e ker fall armer, a-enep ar Pruss?

Republikaned, kaer ho pezo, ar virionez a lavarar ama ne lakeoc'h ket anezhi da veza gaou birviken.

Ar roueed koz eo ho deuz great euz a Vro-C'hall eur vro gaer, ar gaera euz ar bed; eur roue euz ho gouenn hep-ken eo ive a c'hell, Doue oc'h he harpa, digas anezhi adarre, evel ma'z eo bet guechall, ha lakaat distaol d'e-omp

kement tra-hor beuz bet kollet gant Napoleon hag ar Republik.

Dre-ze, ne deuz ezomm e-bed da gaout aoun evit lavaret a vouez huel ne gar ket popl Bro-C'hall ha ne garo hirviken ar Republik ; enep he c'hoad eo karet ar c'houarnamant-ze.

Pep douar, hervez he natur, a ro he frouez hag he ed ; pep den ha pep pobl ive en deuz he demz hag he natur, evel ann douar, temz ha natur a c'hell, guir eo, dont var vellaat, gant na vezo ket klasket ho zrec'hi dre nerz, gant ma vezo respet evit ho. Hoguen, mar klasker ho zerri hag ho sench enep d'ezho, evit neuze a-vad e ve labour ha poan gollet ! — Ar Republik hag ar Republikaned berr a skiant ho deuz koulskoude lakeat enn ho fenn ober eur seurt labour ; mont var gorf ho roched a c'hellont, rak eur goal-labour avrek ho deuz digoret eno ; ha, dioc'h ann doare ma'z eont gant-hi ho devezo kalz poan hep kalz a vad. Mar ho defe eur begad skiant e flefent gouzout koulskoude a teu atao ar vezenn d'he fleg hag ann den d'he natur.

Bezit fisianz eta, tud Breiz ! ann amzer zo ne bado ket, gant ma vezoc'h atao stard enn ho lezenn, gant ma tiskouezoc'h ho peuz skiant ha ma choumoc'h hep kredi guer d'al laboused glaz ha melen a velit o nijal divar-dro ar c'heriou.

enn ho pro ; evel brini int mad da skrabet ha da chaokat. List anezho ha dalc'hit atao da heullia kelennoù hag aliou mad ann dud fura a zo gan-e hoc'h o veva, ann dud a anevazit pell amzer zo ha ne velit gant-ho nemet pep skouer vad ken enn ho zi, ken er meaz. Evit ar Republik, mar klevit komz anezhi hag he meuli zo-ken, list ar c'homzou hag ar meuleudiou-ze da vont gant an avel, rak avel int ha netra ken, pa deuont euz a bennou avel.

Perak ar Republik, va zud, ma vije bet eur c'houarnamant hag a dalc'he ar boan komz anezhi, ne vije ket bet padet keid ha gouarnamant eur Roue ? Perak ? O veza n'eo ket, etre daouarn tud diskiant ha diroll pep tro, evit lakaat evel gouarnamant eur Roue, ar peoc'h er sperejou, na rei d'ezho diskuiz ha nerz e bed evit labourat da greski ar madou hag ann enor, evit lakaat ann dud euruz ha digas d'ezho fisianz enn amzer da zont. Ar Republik, pa ne deuz evel-se harp e nep leac'h nemet var dud-orell, a rank ive choum ken orell hag ar re-man ha dre-ze ne d-eo ket evit rei harp da zen-na da netra, pa ne deuz ket he-unan.

Brema eta, tud divar ar meaz, pa'z eo guir ec'h anavez ar Republikaned ez oc'h tud a skiant hag a vemor, lavarit d'ezho : « Ni a c'hoar koulz

ha c'houi ha marteze guelloc'h petra voa Bro-C'hall guechall ha petra eo brema; ni a c'hoar hor beuz brema kollet kalz a c'hoad iac'h ha kalz a arc'hant, hag ez euz distaguët diouz-omp, gant hon enor, diou vro gaer bet staguet gwechall gant eur roue oud hor bro. Gouzout mad a reomp koulz ha c'houi, gouzout guelloc'h zomui-ken, e rankomp paea gant poan hon divreac'h ha c'houezenn hon tal ouspenn ann hanter muioc'h a arc'hant d'ar Republik brema, evit na baet, amzer zo bet, d'ar rouanez koz; hep komz ouspenn euz ar pemp miliard a zo bet stropet d'e-omp oud hor c'houk gant Republik Gambetta ha laboused all ker ruz hag hen.»

« Brema, Republikaned, barnit etre ann diou amzer, hag ho tourn var ho kaloun, mar deuz c'hoaz kaloun en ho kreiz, lavarit pe ni, tud divar ar meaz, tud a skiant hag a vemor, pe c'houi doktored, difennerien ar Republik, eo a zao gwella gant guirionez ann istor? Mar hor barnit, ni ho parn ive, rak deut omp da anaout piou ha petra oc'h. Ni a vel er-vad brema *e tleomp lakaat hor fisianz hep-ken enn dud n'ho deuz biskoaz tromplet ac'hanomp, enn dud ho deuz hed ar veach klasket hor mad hag ho deuz atao ive dalc'het d'ar Roueed koz ha da bep lealded.* C'houi a-vad, ken etre-z-hoc'h

Republikaned hirio, a horjell dioc'h ann amzer a vez a-gleiz pe a-zeou hep dere'hel da netra, nemet da c'honoc'hal kroasiou, kargou, enoriou, nemet da heullia ioulou-drouk ho kaloun; da lavaret d'e-omp-ni gevier ker stank ha treaz ann arvor, evit lakaat ac'hanomp da voti evid-hoc'h pe evit tud ho Republik. C'houi, paotred, mar hoc'h anavezomp mad hirio, eo ar re-ze a zo brema o floura ac'hanomp, o veza ma ho peuz ezomm euz hor mouesiou, goude beza embannet e pevar c'horn ar vro, n'euz c'hoaz nemet eur miz-bennag abaoe, ne voamp nemet *tud kleuk, tud gouez, sperejou dall ha forc'hek, ezen dabu droadek* hag enn eur c'hoarzin goap, o lavaret e voamp *chatal divar ar meaz.*

Ia! ia! aotrounez ar Republik, bretonned divar ar meaz omp hag ouz-omp pennou kalet ouspenn, pennou ha ne vezint ket distroet dioc'h ho mennosiou mad gant pennou avel ha tud gaouiad evel-d-hoc'h-c'houi. Na deuit ken eta hiviziken da uza var hon tro nag ho flemmou nag he karnou; choumit enn ho kear da ober ho labour, da c'hounid ho poed, mar gouzoc'h; ni, pegument-bennag ma'z omp tud kleuk hag ezen, eme c'houi eur pennad zo, ni a c'hoar petra hon deuz da ober hep kemeret ali digan-

e-hoc'h. Kenavezo eta ha tec'hedou, lammerien dreist ar c'hleusiou ! »

Bretouned, tud divar ar meaz, o komz evel-se, ha gwelloc'h c'hoas o c'hober evel a lavaroc'h da baotred ar Republik, e veloc'h gwelloc'h-gwella petra int ha pe liou a zo var-n-ho. Laoskit traou ar seurt-se da vont pell diouz-hoc'h ha pa vezo ann deiz d'e-hoc'h da voti, da gas tud pe d'ar Gampr, pe d'ar C'honseil general, pe n'euz forz da betra, na da beleac'h, anavezit da guenta ann dud leala a zo enn dro d'e-hoc'h, goulennit ali digant-ho, ne ket a-vad digant ar Republikaned a c'hourdrouzo ac'hanoc'h pe a brometto d'e-hoc'h kant tra gaer n'ho pezo hini anezho. Na rit van euz a bromessaou nag euz ar c'hourdrouzou ! N'hoc'h ket d'alc'het tamm ebet da lavaret da zen petra zo enn ho spered na var ho tamm paper, a zo eun dever d'e-hoc'h mont d'he gas d'al leac'h ma'z eo lakeat gant al lezenn.

Eunn dever eo ive d'e-hoc'h, goude beza bet aliou ha kelennou tud fur, heuilla anezho penn da benn, hervez ho skiant hag ho koustianz. D'ann daou dra-ze e tleit derc'hel oc'h henvel ar re a gasoc'h d'ar C'honseil général, muioc'h c'hoaz brema evit biskoaz, rak n'ankounac'hait ket ma ve enn dro-man treac'h niver ar re fall

da niver ar re vad, e tigorfe abred adarre guasoc'h freuz ha kabal evit na zo bet n'euz ket pell c'hoaz.

Dre-ze eta, Bretouned divar ar meaz, digorit ho taoulagad, mar fell d'e-hoc'h ober ho mad ; it holl da voti hep mank, ha votit atao evit ar re vella a glevoc'h pe a anavezoc'h. Choum hep mont da voti, a ve leuskeul kabestr gant ar Republikaned da ober ar pezh a garfent, pa vent hi hep-ken o voti hag oc'h henvel ar re ho defe c'hoant ha ne vent ket ar re vella, kredit mad.

D'e-hoc'h-c'houi eo eta, d'e-hoc'h-c'houi tud a skiant euz a Vreiz, eo hiviziken diskouez ez oc'h furoc'h, ha c'houi o choum var ar meaz, evit na d-eo ann darn vrasa euz a dud ar c'heariou gant ho sklerijen hag ho deskadurez. Skiant ann den paour a zo gwelloc'h da lakaat anezhan euruz evit na d-eo peurlies a spered ha guisiegez ar re vraz er bed. Kenta guisiegez a zo eo beza atao a-du gant Doue, gant ar feiz hag al lealded. Oc'h heul ar skiant a gas e-tredek enn-ho, Bretouned, tud divar ar meaz, e teuot a-benn atao da anaout ar guir dioc'h ar gaou, ar mad dioc'h ann drouk hag e vezo eaz d'e-hoc'h dont da anaout ive pere e vezo ann dud ne glaskont nemet ober mad, na trompla na bihan na braz. D'ann dud-ze eo d'e-hoc'h rei ho mouez n'euz

forz petra glevoc'h ar Republikaned o lavaret anezho, rak kredi a dleit eo ar re vella atao eo a vez muia tamallet gant ar re-ze.

Bretouned divar ar meaz, it eta da voti holl, arabad eo ha pec'hed e ve d'e-hoc'h choum hep mont, hag o voti roit ho mouez hep aoun d'ar re a anavezit a zo a-enep ar Republik hag ar Republikaned, hag ive a-enep ann Napoleon milliguet.

